

Gwilhom Ar Floc'h – Guillaume Le Floc'h (2)

Louise LE BONNIEC (Mme RIOU) – Pluned - Miz C'hwevrer 1979 (Pluzunet – Février 1979)

«Mea culpa, mea culpa
Me a zo *ur* bec'herez a wasañ.»

«Lesket da gostez ho pec'hejoù
Ha kontet din ho sekrejoù.»

En gwirionez din o lâret
An deiz-mañ piv eo ar muiañ karet ?»

«En gwirionez deoc'h a lâran
Gwilhom ar Floc'h a garan *ar* muiañ.»

«Merc'hig yaouank deoc'h a lâran
Non pas mont da gomuniañ.»

Non pas monet da gomuniañ
Gant ar beleg en oferenn-mañ

Pe gant ar person pe ar c'hure
Pe beleg an oferenn beure.

Soñjal a ra deoc'h oc'h absolve
Pa emañ Gwilhom ar Floc'h a-us d'ho penn !»

«N'eo ket posubl, emezi, ma Doue
Eo Gwilhom ar Floc'h e vez aze.

am eus lâret dezhañ ma santimant
Klevet e hini me *am* bije c'hoant !»

«Ma santimant *ne* 'peus ket klevet
Na kaeroc'h zo ne refet ket !»

«*Mea culpa, mea culpa*
Je suis une pécheresse de la pire espèce.»

«*Laissez vos péchés de côté*
Et racontez moi vos secrets.»

Dites-moi en vérité
Qui est aujourd'hui votre préféré ?»

«*En vérité je vous le dis*
C'est Guillaume Le Floc'h que j'aime le plus.»

«*Petite jeune fille, je vous le dis,*
N'allez pas communier.»

N'allez pas communier
Avec le prêtre pendant cette messe,

Ni avec le curé, ni le vicaire,
Ni avec le prêtre pendant la messe matinale.

Vous pensez être absoute
Quand vous avez Guillaume Le Floc'h en face de vous !»

«*Mon Dieu, ce n'est pas possible, dit-elle,*
Que ce soit Guillaume Le Floc'h qui soit là !

Je lui ai confié mon sentiment
J'aurais aimé connaître le sien !»

«*Vous n'avez pas entendu le mien*
Et mieux que cela, vous ne l'entendrez pas !»